

CHANSON NEVEZ

*Composet gant eun den yaouanc eus Briec, voar sujet e Vestrez pehini e c'har
gant eun amitie barfet*

Var eun ton nevez



Chilaout eur chanson so nevez composet.
Pehini zo savet e mil eiz cant noantes ;
Save gant eun den yaouanq, er blaves ma presant,
En deus laquet e sepret, da re garout e c'hoant,

Nac ebars e Briec, er Blaves man pressant,
Un dra melconius entre daou zen yaouanc,
Pere dre amitie o devao desiret
An eil d'eguille, vezen bet daou bried.

Evel daou ar bar evel erruas promptamant,
Bars er proposiou caër, voa bet deut chanchamant,
A ne songet dean, e voa sur a fidel
A so bet trahisset ya n'en neus quet pel.

Tud ar plac'h man so eas a dud elocanq ;
Graç deo da brospër, ebars er Brovidanq ;
Ma vuelfein heq dal, an daou bried fidel
Ebars en o jardin fleurio caër o sevel.

Me meus choaset eur vestrez zo d'am fantasi,
Pehini dre e guemet a zo deut d'am charmi,
Ganti ma an ale houeou, eus a zor ma c'halon,
Pehini ar grao contant, on daou en hed feçon,

E bleo so allaouret melen, e sin friset
E annal adorabl, evel pa ve musquet,
E daouarn so melet gant ar glas hac ar guen,
E bisach so groet evel d'or berlezen.

E muzellou so douç douç evel ar mel pur,
E anal adorabl evel d'ar surnatur
E daoulagad a vril, e vel dioa stereden,
E gomzou a so caër evel d'eur berlezen,

E Monez so ravissant, a speret angelic,
A laca a rivierou da danzel magnific,
An oll douar a saillo ar pesquet a lampo ;
Hag ar vartolodet en ho lest a zanzo

Ma mestrez a zo caër evel ar bleu ar sper guen :
E diou chot, a so ru evel da zion rozen,
E c'hyenou so caër quer braz ez int pintet,
Dri dal rama c'halon'na deumeus e guelet,

Drindal a ve ma c'halon, na demeus e guelet ;
Mor'la dec'h gout piou eo TINIC a zeo hanvet
Balamour ma c'ed-an hon gan Doue inspiret,
Nac evit e c'hare gant amitie barfet.

Me meus caret va mestres hac e c'haro bepred,
A me e c'burufe, ma ve din p'rmittet,
A me e c'brufe ma ve din permettet,
Quen caër e c'havan, evel an eol biniguët.

E mamm zo quent charmant nac ebars ar bed man
Hi a garant certen, vel va mamm va hunan,
Balamour ma e hi, e deus laquet er bed
Eur plac hic yaouanc flamm pint garant parfèt

Tinic a so quer coant vel d'ar ros er bed-man,
Hannes, a dra certen a blich dan dud yaouanq.
Balamour de furnes hag e sentiment vadl.
N'em deus er baros vel dei quen agreabl.

O c'hoar demed a so eur vreg fur a prudant
O breur a zo ive eun den yaouanq vaillant,
A tout e oll gueren so tud a ligned vad
Deut oll do imita, gant o exemplou mad.

Doue neus crouet guer hac ebars er bed man :
Hag e ve florissant pa ve deut ar mis man ;
Calon au dud yaouanq so ivez memez tra
Pa ve deut ar mis man, a ve carguet ar joa.

Pa ven em c'hamp a goste, o sonjal bars er bed
Me glev eur voesic scler a droubl va speret,
Ma teuis da sonjal pe c'hlevis o cana,
Voa un eostic pe eur voenus, pe ma mestrez Tina.

Arsasta ma mestrez, avanq a ran en oad,
Bet a zo eun amzer evit ober pep tra ;
Mar de contant Doue ni ello assembles
Caër o devez an dud, o trouc presegueres,

Goal Doue, or c'hunduo, lec'h man e volonteç,
Caër o devez an dud, o tronc presegueres,
Dommach a rel a reon hini tam na vouefont.
O trouc pedi pemdeis dec'h éme a deoc'h enont,

Ganti ma an ale'houe eus a zor ya c'halon
Hi e deus hi digor, d'ar Verc hes an Itron,
Hi e deus hi digor, d'ar Verc hes an Itron
Evit antren emni, en e fossession.

Mari a Sant-Joseph voent o daou assembles,
En devoe amitie, an eil evit eguille,
An dra ze so caus, a meus laquet em speret,
Da garout eur plac'hic, marteze e am c'har quet

Quemen ma e c'haran, ne oufe den laret,
Me garfe e dougen en touez an colle,
A neuze pa vem ed ebars er barados
An dud malicïus n'antrefint quet er gos

Pa vezimp unisset, dre ar draç a Zone,
Pe gafomp quet an amzer hiroc hevit eun de
Quen a vo deut an heur, da vont eus a bed-man,
Pa zeuint da vervel mont a dare gantan.

Ma presantfe dei eur boquet, ma ve permettet din,
Pehini e ma c'halon, ne gar den nemetti ;
Mes ma na bermet quet, nac o queren ganae'h
Adieu, er barados, quenavos a laran deoc'h,

An teot malicïus so caus a gals a gol,
Quement e zo ne, ma reont drouc ar bed-oll,
Ma aifen commandi, ebars er joaüstet,
Gant ho ambission, ne aife d'en monet,

Mes gouzout eo ra ambission zo bras.
Hennes so eur pec'het ha ne guitait quet e'hoas,
E touez ar gueren memeus a re dosta,
A ve an ambission a vechou ar goasaan.

Ar zon ma zo zavet, cerien a zo guir.
Ha zavet d eun den yaouanc nalpuet kaout e zezir,
Abalamour dan dud gant ho ambission
So o ampieh anean nac ebars er c'hanton.

Marteze lod a c'hoarzo voar sujet ar son nevez
C hoarzin ar bez a gafont, na rin quet a boan dime,
Lod a ve e c hoarzin na voan o sotani,
A bel al oc'h ober goab anezo o mon in.

Ma clevfe ar Roue, quellou eus ar plac'h-se
A zeufe da Vriec gantan eur messenger,
Da prononçaa e hellou, enep d'ar plac'h yaouanc.
Evit ma disabuso, quemeh an deus dei c'hoant.

Adieu melezeour caër, adieu tremen amzer.
Mont a ran d'a Guemgamp, en desert a gaer.

Mammalas d'ar goal deot, vern quet piou a zisput
Ma c'halonie a ran ar goal deot a ra vo mud.

Ma teldec'h gout a glevet gant piou eo a son ma gret,
Ganteur paysan yaouanc eus ar bares Briec,
Ganteur paysan yaouanc eus a draou ar bares,
Hennes en deus he sovet, goude coant eur noves

Mes ma so unan banag bars e compagnones,
Hag en defe desir da c'hout piou eo hennes :
Eo eur paysan yaouanc, eus a draou ar greisquer,
Ma fel d'oc'h gued piou eo c'hui c'halvo an eo PEE

Asso compagnunez, iscus a c'houlennan
Ma n'em deo quet gret ervay ar chanson-man,
Me so eug den yaouanc ne mes quet ar speret,
Difaiet a c'hanou elec'h ma zou faiet.

Clevet a red breman cetu a pen ar fin,
C'hou a lezo anet me ne ouzoc'h quet quen,
A nep a gavo dean, n'en de puet doneat
A gomposo eun oll hag a vo agreabl.

KANAOUEN AN DUZUNEL

Cals amzer a meus kollet
O furchal a c'hoajou,
« Vit surpren eun durzunel
Kousquet var a brankou

Devet a meus ma amors,
ffo tannet a meus fall,
Achapet an durzunel
Ha nijet er c'hoat all,

(bis)

Dious an noz hag ar mintin,
O klevet lapousset
O kana, e fredonin,
D a vek ar gwez pignet,
Na neus nikun anezo
Hag a bik ma c'halon.
Evel mouez eun durzunel
O welan d'he mignon,

Hirvoudin a ra noz d e
Gant ar boan ar glac'har,
Evel e2n intanvez paour
Kollet ganti e far,
Ma neus nihun anezo
Hag a bik ma c'halon,
Evel moez eun durzunel
O welan d'he mignon.
Petra durzunel youank,
A dourmant d'ha c'halon †
« Kollet a meus, emezi.

Ma fidellan mignon.

Ma ne zo chesseour
Da ober din mervel
Me varvo gant a glac'har
Da va mignon fidel

« Neus na zoulent, na r emet
Ner consolation

Kapabl da sont da galmin
Tourmancho ma c'halon
Trec'het oun gant ar glac'har,
Mont a ran da vervel
Mez na varvin ket kontant
Ma na varvan fidel

Geulet a meus o vervel
An durzunel yaouank
Dizec het ma c'halon,
Gant ar boan nan tourmant,
En hec e'huanan diviza
En deuz e'hoas repetet
« Ha ma mignon fidel
Ractal eo tremenet

Melezeour seler ha brillant
Demeus a fideliter
Ar model ar sinceran
Demeus ar garante,
Nan, na vervin ket kontant
Ma na vervan fidel,
Birviken na sizonjin
Maro an durzunel

Bourne Jean Louis